

DALC'HOMP D'HOR FEIZ

DISKAN :

Da feiz hon tadou koz, ni potred Breiz-Izel,
 Ni'zalc'ho mad ato ;
 'Vit feiz hon tadou koz, hag en dro d'he baniel
 Ni oll en em stardo,
 Feiz karet hon tadou, morse ni'ho nac'ho
 Kentoc'h ni a varvo.

1.

D'ar c'hrouadur bihan, e kichenig e gavel,
 E lakit eur vam vad, en deiz evel en noz ;
 Er boan hag en anken, houman buhan ra eur zell
 Var ~~as~~ groaz santel, *jezus* le zonz er baradoz.

2.

D'ar potr, d'ar plac'h yaouank, c'hui ziskouez hent ar
 C'hui lavaren heuilla eb crena dirag den ; [furnez,
 Bezit, tud yaouank Breiz, bezit epad ho puez *cf. femme*
 Ato gwir gristenien ha morse treitourien.

3.

D'an den koz gwen e benn, e korn an tan azezet
 O skuill daelou a geuz var e amzer genta,
 Varlerc'h kals a boan, c'hui lavar, Salver ar bed,
 Er baradoz e vo eürusted evithay

4.

D'an den divar ar-meas hag ive d'an den a vor
 C'hui a ro nerz-kalon er poaniou stourm outho ;
 Gouzout 'reont en env, e kavint oll dor zigor
 Ar vuez vo bet tenn ; d'an drubuil kenavo.

Goulien, d'an 12 viz Ebrel 1906.

(Tous droits réservés.)

IMPRIMERIE : Quimper, le 13 Avril 1906.

F. CORRIGOU, vic. gén.

Quimper, mouillet e ti de Kerangal.

